

# DEZRVELLOÙ AN DUD KENFINET RÉCITS DE CONFINÉS

*Ar vuhez sioul : ur begadenn, kammedoù kentañ.*

*Hiziv evel dec'h ha sur-a-walc'h warc'hoazh  
Aet an egor hag an amzer  
An holl en amañ ha bremañ.*

*Er mare-mañ bac'hadur ha digenvez  
An ti kloz ha gouelec'h  
Met bev gant eñvoriou eürus.*

*Dont er maez diouzh ar c'houk*

*Goustadig  
Terenn heol o treuziñ ar stalaf.*

*Chuk orañjez, te ha tostennoù,  
Gerioù saezhennet,  
Lid kentañ un devezh mat !*

*Bep mintin e bed al levrioù  
Soñjal pe huñvreal  
Ma spered frank da vont kuit !*

*Glav a ra  
Sec'h eo an douar*

*Ober levenez ha lavaret trugarez gantañ.*

*Kan ar glav ouzh ar prenestr  
Eürus da vezañ e-barzh*

*Souchet e kalon an ti.*

*Chom azezet er gador-vrec'h  
O sellout ouzh netra*

*Luskellet gant tik-tak dinec'hus an horolaj.*

*Ar c'hazh o trotellat da doull an nor  
Evit mont da belec'h ?  
War-zu an amzer vraz, war-zu ar frankiz !*

*Evel ar vugale vihan  
Un danevell pe ur skeudenn gaer  
A-raok mont da gousket.*

*Brigitte, live uhel Marc'h Mor*